

DANVEZ PROGRAMM LENNEGEZH EVIT AR YAOUANKIZ

PALIOÙ :

- 1 - Anavezout gwelloc'h al lennegezh evit ar re yaouank e brezhoneg (kazetennoù evel : Wenig ha Wanig, Cholori, Moutig, Rouzig, Louarnig, Toutouig, ... ha levrioù bet savet e-pad ha war-lerc'h ar brezel diwezhañ hag ivez ar 150 levr bet embannet evit Priz Ar Vugale ha Priz ar Yaouankiz).
- 2 - Bout gouest da sevel ur skrid berr en ur stal-labour un eurvezh : pajenn gentañ ho raktres skrivañ, diviz etre div dudenn, ar bajenn diwezhañ, taolenniñ ul lec'h, un den...
- 3 - Mont war-raok war e raktres skrivañ.

UN DAMSELL WAR STAD AN TRAOÙ

Hiziv an deiz e vez lennet romantoù gant 1 000 bugel evit Priz Ar Vugale ha Priz Ar Youankiz, ha lennegezh ar yaouankiz gant «Lenn ha dudi» en holl skolioù Diwan (1 500 bugel er c'hentañ derez). Ret eo deomp kaout skridoù a galite a lak tud da lenn, ha bugale ha krennarded da genderc'hel da lenn war-lerc'h. Ne vez ket gwerzhnet muioc'h a levrioù eget e penn kentañ skolioù Diwan. Perak ? Poent eo soñjal e stummadur al lennerien yaouank evit mont war-raok.

PAL / DISOC'H AR SIZHUNVEZH

Gallout kinnig h.e raktres skrivañ e fin ar sizhun, dre skrid pe dre gomz", ha kinnig anezhañ a-benn ar bloaz evit ma vefe kazi prest da ginnig d'un embanner, d'ur gazetenn lennegel, d'ur c'honkour skrivañ (Priz ar Yaouankiz ha Priz ar Vugale, kenstrivadegoù danevelloù Karaez, Redon, Montroulez...).

DOARE DA LABOURAT

Da vintin : poelladennoù skrivañ, divizoù, pajenn gentañ, ur pennad "doare ur skrivagner.ez", ur "mikro-istor" a-ziwar ur frazenn...

D'enderv : pep hini a yay war-raok gant e raktres, pep hini diouzh e du pe daou ha daou (degas un urzhiataer, un alc'houez USB) difaziañ ar brezhoneg evit ma vefe reizh, pinvidik hag a-live gant al lennerien yaouank.

A-BOUEZ-

Dont gant un istor « savet » (penn kentañ, fin, steuñv an istor, gouzout resis penaos kas an istor, kaout un dra bennak da reiñ da lenn d'ar re all : div bajennad, roll ar pennadoù...).

EVEZHIADENN : Pleustret e vo war an danvez-se bemdez eus 9 eur betek kreisteiz hag eus 2 eur betek 5 eur goude kreisteiz, a-hed ar sizhun.

Ar stajidi o devo dibabet mont gant ur rummad diouzh un tem ne c'hellint ket kemer perzh er c'hentelioù brezhoneg kinniget diouzh live an dud.